

LIZER

AN

OTRO N-ESKOP ZANT-BRIEG HA LANDREGER


D'ar Veleien ha d'ar Gristenien eus e Eskopti

Ha Gourc'hemenno ar C'Hoareiz

evit bla 1925 goude donedigez hon Zalver

Ar bed, ma fell d'ean chom en e zav

A DLE ANZAV DOUE HAG E WIRIO



SANT-BRIEG

MOULLET EN TI RENE PRUD'HOMME

Mouller an Eskopti

1925

LIZER

AN

Otro n-Eskop Zant-Brieg ha Landreger

D'ar Veleien ha d'ar Gristenien eus e Eskopti

HA GOURC'HEMENO AR C'HOAREIZ

EVIT BLA 1925 GOUDE DONEDIGEZ HON ZALVER

AR BED, MA FELL D'EAN CHOM EN E ZAV

A DLE ANZAV DOUE HAG E WIRIO

FRANÇOIS-JEAN-MARIE SERRAND

Dre drugare Doue ha beli Hon Tad Zantel ar Pab,
Eskop Zant-Brieg ha Landreger,

D'AR VELEIEN HA D'AR GRISTENIEN EUS ON ESKOPTI
Peuc'h ha bennoz a-beurs Jezus-Krist, Hon Otro

HON BREUDEUR KER,

Kement Sosite, evit chom en he zav, hag, evel just,
evit mont ervad ha bean evurus, he deus eomm da
wélet peuc'h ha karante o ren etre and dud a zo enni.
« Kement rouantelez a zo droug-intent enni, a lavar
an Aviel, a deui da vean eun douar a dristidigez
hag a dêro, ha kement ti a vo ennan bue fall a goueo
hep mar » (1). Teulomp hon daoulagad en-dro d'imp :

(1) Math. XII 25.

awalc'h eo evit gwelet pegement a dismantr a had an dizunvaniez war he lerc'h.

Met ar peuc'h hag ar vue vad n'int ket daou dra hag a diwan evelse etre an dud pa deuont da 'n em vodan ha da vevan asamblez ! Ar pez 'zo gwir, ne digoue ket da bep hini anê al loden an neve c'hoantaet kât evit bean evurus. Darn anê a zo a-ust d'ar re all o ren hag o rei urzio, ha darn all a dle zenti ; ha ma plij da galon eun den bean mestr ha rei urzio, pegen dies ive na gav ket an hini a renk zenti ! O Ia ! holl e santomp en gweled hon c'halono bulum an ezen fall-ze hag a dree'has gwejall war ar c'hentan sperejo direiz a zo bet, war an droug-Ele, an de ma loskjont o youc'haden : « *non serviam* », ne zentfomp ket. » Eur galloud vras, eur galloud spontus, pa vo laret ar wirione, a zo er bulum-ze ; hag evit ma trec'ho warnan ar spered a-zentidigez a laka an den da blegan dindan dorn e Vestr, e renk e galon hen, kenkoulz ha kalon ar Mestr, bean gret gant danvez mad. En kalon ar Mestr e zo eomm daou dra war an dro : ar furnez hag ar vadelez ; hag ar zervijer a dle kât eur galon doujus ha distag diouz he flijadur ; ha ze n'eo ket empad eun devez pe gwej ha gwej all, met empad o bue, hep ehan.

Ma teu ar furnez da vankout d'ar Rener, an hini an neus zenti da ober, pa wêlo ec'h eo fall renet hag an neus skoet ar re a zo a-ust d'ean ar justis dreg kein, a zavo e vouez a-eneb : ha setu dizunvaniez.

Lakaomp en neus ar Rener ar furnez hag a ro da

bep hini e wir, ma vank d'ean ar vadelez, liammo ar garante ne stagfont ket ar galono an eil ouz eben ; ar mestr a vo kri ha re bounar e zorn, hag ar zervijer gwasket ha gloazat na gavo war e vuzello nemet klemmo ha komzo a gasoni : setu adare dizunvaniez.

Met ive, daoust d'ar rener bean ken fur, ken eün, ken mad ha tra, daoust d'ean da gât kement ijin vad a c'haller c'hoantaet evit eur Rener, ma n'eus ket ar zervijer eur galon distag eus he flijadur, neuze heman ne blego e benn nemet dirag ar pez a denno d'e gov pe d'e c'hodel ; hag eneb ar pez a stourmo ouz e c'hoant, e savo reut ha kounaret : ha setu bepred dizunvaniez.

Ne diskan d'ec'h netra o laret d'ec'h n'eo ket eun dra êzet bean ha chom bepred ha bemde fur, just ha mad, pa ver lakaet a-ust d'an nesan : — Evit ar pez a zell eus ar furnez hag ar justis, an hini na vo rebech ebet da ober d'ean, a c'houveo diwall bepred da ober tra ebet re vuhan na diwar ar menoz kentan, ha diwall ive da 'n em skuizan biken. Evit-se, eo red kât eur spered eün ha poellet mad en kement tra a rer hag a zonjer, ha kemer amzer ive da boezan peb tra gant gwiegez ha kouztians. Evit-se, eo red diwall da lezel ezen an enorio da zevel d'ar penn d'e vezvenni, hag en kreiz ar brasan enorio, 'n em virout humbl, plen ha ien. Evit-se, e tleer chom dalc'hamad, hep bean trec'het, a-ust d'an tentasiono a deu a vil-vern d'an den deus peurz an arc'hant pe ar blijadur. Ha c'hoaz ne gomzan ket eus ar wiegez eo red kât deus

ar c'hêran, hag ar spered deus al lemman evit galloud delc'hel e blas ha diluian peb tra. Kement-se, koulz laret, a zo dreist galloud an den. — Evit ar pezh a zell eus ar vadelez, red eo kêr eur vertu grenv awalc'h evit harz a vean re boaniet, harz a goll kalon ive ha harz a vont en kounar, pa wêler nan anave an dud nag al labour grêt nag ar boan kemeret evitê, pa na diskoeont tamm anaoudegez vad ebet evit ar vad grêt d'ê, ha pa zanter deus o feurz dismegans ha displeaded. Kement-se ive a zo, ken koulz all, dreist galloud an den.

Ha breman, ma lezomp a goste an hini a zo lakaet da ren, evit komz eus an hini a dle zenti, hen gouzout a red koulz ha me, evit plegan just dalc'h-mad dindan dorn an nesan, hep sevel biken eur gir uheloc'h evit eun all nemet gant doujâns, n'eo ket eul liouaden a vertu hepken a zo eomm; nan; kement-se a c'houll digant ar zervijer gouzout tewel aliez ar pezh a sonj, ha ken aliez all morgan e c'hoant ha mont eneb e vad e-unan.

Pen-eo-gwir ar peuc'h, an unvaniez hag an evurusted e-touez tud eur Vro a dalve kement-se, hag-en eta brasan preder ar re a zo karget da ren eur Bobl ne dleje ket bean o klask, evit hen skrivan doun en o spered hag en spered ar re a zo dindanê, ar pezh a c'hall rei d'ê o-unan, fonnus ha padus, ar furnez hag ar vadelez, ha d'o zud, krenv ha diazeet mad, eur galon distag eus he fljadur, gwir vammen ar zentidigez?

Met an treo-ze holl, pelec'h e vefont kavet ! Pelec'h e man ar vammen viniget ze, a rei dalc'hmad d'an hini a zo en penn ar re all, ar furnez hag ar vadelez hep ma tivio biken, hag a rei ive, keit ha ma karo, d'an hini a dle zenti, an nerz-kalon an neus eomm evit bean doujus ? Ia, pelec'h ? Dustu e respontan : en Doue ; ha raktal goude e stagan eur gir all : en Doue hepken, rag a-ziavez da Zoue, ne wêler ket penoz e tiazefer ar vadelez hag ar furnez na penoz e tiefer bean doujus. Ah ! an hini a zav e di war Doue, n'eus eomm ebet da gât aoun : ar glao a c'hall dont gant an dourio bras, an avelaj gant bario-arnê, an ti a chomo en e zav, daoust pegen krenv e vo ar bario-amzer, rag war ar roc'hel eo bet zavet. Met an hini a zav e di a-ziavez da Zoue, ziuas ! ne vo eomm na glao, nag avel, na dour-bras nag arnê evit diskar anean : rag en e greiz e man ar pezh a lakao ar vein da 'n em distagan an eil diouz egile, hag anean e-unan e koueo (1).

Ar pezh eta ac'h an da gomz anean dirazoc'h, Hon Breudeur Ker, a zo, hen gwelet a red sklêr mad, eun dra a dalvoudegez vras hag a deu en koulz en amzer a vremen. Red eo goût eta hag-en, 'n eur ober deus hon Bro dirag ar bed holl eur Vro didoue — Kement-se a zo bet diskleriet c'hoaz nevez-zo en Kambr an Deputeed gant unan anê — hag-en, a laran, ar re a zo en penn ar Vro hag o deus skoet Doue e-mêz a

(1) Matth. vii. 24-27.

dollio lezen, n'o deus ket lakaet anomp war eun hent hag a gaso anomp d'an dismantr an euzusan. Kement ac'h an da laret an neus re a boez hag a dalvoudegez evit n'allfen ket zonjal e lakafet hoc'h holl evez ha preder d'am chilaou.

I

Bean zo, a gredan, nebeud awalc'h a dud — n'int ket stank, en gwirione, ar re a gemer ar boan da zonjal eun nebeudig war an treo-ze, ha da wêlet dre o spered beteg pelec'h a gaso anê an hent o deus c'hoantaet kemer, eur wej grêt ennan ar gammad kentan — nebeud awalc'h a dud, a laran, a deus lakaet doun en o spered ec'h eô diazeet kement mad ha kement furnez a zo e-touez an dud war men-font an O. Doue.

Ma nac'het Doue, petra c'hoarve ? Red eo d'ec'h neuze ive nac'h ec'h eo bet grêt ar bed gant unan benag Speredet kêr ; hag 'n eur nac'h ec'h eo bet grêt ar bed gant eur Spered skiantet mat, e nac'het, e-skeud-se, ec'h eo bet gret ar bed evit eun dra benag, hag e man dindan eul lezen benag bras pe vihan hag a laka peb tra da vont war rog gant urz ha furnez. Ha pen-eo-gwir ne zo lezen ebet er bed, e nac'het ive e zo eul lezen hag a c'hourc'hemenn heuilh ar vad ha trei diwar ar fall. Met nac'h al lezen-ze eo nac'h e zo deverio da ober, ha nac'h an deverio, eo lakat war ar memes renk ar vad hag ar fall, ar

vertuio hag an techo fall. Neuze, 'vel just, ne zo ken treo hag a dleer ober ha treo all a dleer harz outê. Kêr ho po ober... ne zo ken na merit na diverit. Ne van ken nemet treo noazus pe dalvoudus evit ar vue-man, treo hag a rei plijadur pe displijadur. An den, eta, ne dle ken bean nec'het nemet gant eun dra, gant ar pez a denno d'ean arc'hant pe blijadur. An treo all ne gontont ket ; an treo all ne dalveont mann ebet ken, ha ne zo nemet an dud kollet gantê o skiant hag a c'hall c'hoaz rei d'ê eun dalvoudegez benag.

Gallout a ret gwelet dustu beteg pelec'h e c'heller mont gant an hent miliget-se. Bremanzouden e larfomp eur gir deus-se ; met, arog, ken spontus eo an doare-bevan a denner eus ar greden fall-ze, ken e sonjomp eo mad, bete goût e teufe c'hoant da unan benag nac'h anê, displegan hirroc'h ar pez ac'h omp o paouez da zisklerian berr-ha-berr.

Ar Skritur-Zakr a lar d'imp eo red bean kollet ar spered evit nac'h e zo eun Doue : « *Dixit insipiens in corde suo : non est Deus* (1) » ; « an diskiant an neus laret en e galon : ne zo Doue ebet ». En gwiricne, an hini n'oull ket anzav e zo eun Doue, a zo barnet da laret treo diboell ha diskiant, ma kar trei e spered da zonjal war ar bed, penoz ê grêt, deus pelec'h e teu, petra a zo kiriek e zo ennan kement a chenchamancho, ha ma kar klask eur respont da bep tra. — Eun dro benag, en eul lizer all, ec'h on en

(1) Ps. XIII. 1.

sonj da diskoe d'ec'h kement-se, n'eo ket dies hen ober. — Ia, barnet eo da laret treo diskiant, met pe ve d'ober lakât Doue er-mêz, an dud, siouaz ! ne zouzont ket dirag ar zonjo diskiant — kement-man a weler peil a zo — rag asamblez gant Doue o deus eomm da gas-kuit e c'hourc'hemenno, alies gwall boanius da heuilh. Bean zo eta tud hag a nac'h e zo eun Doue.

Ac'hanta da gât ar re ze 'n em droan hag e laran d'ê : Lakaomp eta evit eur pennadig e man ar wirione a du ganec'h, neuze e tleet anzav nan eus an den Mestr ebet ken, da laret eo : anzav ne zo den ebet ken hag a c'hall rei gourc'hemenno gant an droet da vean zentet. An den, en gwirione, a wêl en dro d'ean tud eveltan, hag an dud-se marteze, a c'hall klask lakât anean da b'legan d'ê, ia dre nerz, met n'eo ket dre m'oe deus galloud da liamman e gouztians ha da laret d'ean ec'h eo eun dever evitan ober an dra-man ha diwall da ober an dra-hont. O beli warnan n'eo nemet a-ziavez ; n'allont ket, e neb feson, kemer troad war ar gouztians. Kêr o devo 'n em vodan kement ha ma karfont ha dizklerian asamblez menozio, ha rei d'ar menozio ze an hano a Lezen, n'eo ket an niver deus an dud a rei d'ar menozio ze dont da vean Lezenno, chom a refont menozio, c'hoantedigezio, ha netra ken, ha mann ebet n'allo biken rei d'ê ar merk zakr e pleg dirakan ar penn hag a douj ar gouztians. Marteze e vo kemeret evit tud fall ar re ac'h ei eneb d'al lezenno ze, met n'oe devo, en gwirione, grêt fallagriez ebet, o

vont eneb d'ê, pen-eo-gwir ar fallagriez, ma ve intentet evel pec'hed, ne vo nemet eur gir ha netra ken. Neuze, raktal pa renkfont 'n em diezi tamm pe damm evit heuilh ar gourc'hemenno-ze, e sonjfant e vijent gwall diskiant 'n em lakât dindan ar bec'h. Hag en kenver al lezenno-ze ne vo ken evitê nemet eun dra : ober deus kât ar muian blijadur ha diwall da vean gwelet na tapet.

Goude bean digaset an dud didoue da anzav kement-se, e c'houllan digante breman : laret d'in : hag-en e kred d'ec'h ec'h eo evit Mad ar Vro e lezfer dirag daoulagad he zujidi he lezenno dic'halloud ? Hag-ên eo evit Mad ar Vro na virfe al lezenno-ze na nerz nag istim, nemet marteze, an istim a ve evit eun dra grêt gant aoun dirag ar jendarmed ? Oh ! pegen bresk eo eur gourc'hemenno na gav diaze ebet er spered nag er galon ! Pegen nebeud a dra neuze a zo red evit bruzuni anean !

Met dalc'homp da vont : gant an dud se n'oullan ket chom hanter-hent. Hag e larin d'ê c'hoaz : Lezel Doue a goste ! Hen nac'h ! Met n'oe'c'h ket fur awalc'h ! Neuze n'allet ken mirout en kalon peb den al liberte ! Rag, mac'h eo gwir penoz ar bed, evel em meump laret c'hoaz, n'eo ket bet krouet gant eur Spered skiantet mat, gant Doue, neuze an nerz a zo e kreiz ar bed hag a laka bemde an treo da greski ha da ad-neveât a zo eun nerz diskiant ha dall. Met evit ober e choaz etre daou dra, eo red bean speredet. Neuze eta, pen-eo-gwir er bed ne zo spered ebet, ec'h eo sklêr

n'all ket dibab pe mont da eun tu pe mont da eun tu all, met renkout a ra mont trezek lec'h ma ve douget, da laret eo, nan eus ket a liberte, hag ar pezh a ra nan eus ket ar galloud d'hen ober ac'hendall. An den ive a zo eun tamm, eul loden vihan deus ar bed-man, eur freuzen douget gantan; neuze eta eo henvel ouz ar bed, hag evel ar bed, e dad, hen ive n'all ket ober e choaz etre daou dra : ar pezh a ra eo red d'ean hen ober; nan eus ket al liberte.

Evelse, hen gwelet a red, pa lezer Doue a goste, e tichans d'an den gwelet e zo deus an daou du eun dra benag hag a harz zevel al lezen da vean doujet herve an urzh hag ar vad... Deus an daou du am eus laret : da gentan deus tu al lezen hec'h-unan, pen-eo-gwir n'eo ket eur gwir lezen, o vean n'all den zevel anei; d'an eil, deus tu an den ive, rag al lezen, grêt evit ren eur vue urzet mad, n'all ket bean douget nemet evit tud hag o deus liberte da ober ar pezh a reont bemde. Ac'hanta, ebarz ar bed, elec'h ec'h e skoet Doue er-mêz, n'all ket an den kêr an disteran liberte!

Hag e-tuont, e c'houllan c'hoaz kement man : laret d'in : petra eo an dever, ma n'eo ket an doare da vean diskleriet d'ar gouzians gant al Lezen? Met ma na zo Doue ebet n'all bean lezen ebet, am meump laret. Hep Doue, eta, netra n'all bean gourc'hemennet pe difennet d'ar gouzians : ha setu ive an dever d'e dro n'eo nemet eur gir ha netra muioc'h : nan eo netra : gwelloc'h eo eta kas ar gir er-mez deus ar iez. — Met an dever ne dilez ket e-unan ar bed didoue : chachan a ra

war e lerc'h an treo all holl a zo stag outan : ar vad da gentan, rag ar vad petra n'eo ken nemet ar pezh a lavar d'imp ober mouez an dever? ar fall ive, rag ar fall petra n'eo ken nemet ar pezh a c'houlen mouez an dever diganimp diwall outan? Neuze, rag red eo mont beteg ar par pellan, n'aller ken komz eus treo just hag injust, rag petra eo eun dra just? eun dra grêt herve an droet. Hag eun dra injust? eun dra grêt eneb d'an droet. Met ne zo droet ebet elec'h ne zo dever ebet. Heuilhet, mar plij ma zonz penn-da-benn : petra en gwirione eo eun droet? ar pezh zo dleet. Ha petra a zo dleet? ar pezh a zo an dever da rei d'ec'h. Hag-eta n'eo ket gwir penoz en diavez da Zoue, ne zo ken na treo just na treo injust?

Pebez dismantr! ha pegen frommus eo paran an daoulagad war an diamant-se! Ar spered, dirag kement-se, a chom spontet, dilavar. Perak! Dever, Doue, Mad, Gwir, Lealded, c'hwi, ken uhel, ken zantel ha ken dign a zoujans, c'hwi hag a laka eur sklerijen ken skelt ha ken dous en hon sperejo, c'hwi hag a adnevea d'an ine he nerz hag he levenez pa deu da dizrei d'ho kat evit diskuizan diouz fallente ar bed, daoust eta hag-en ne vijec'h nemet eur skeuden hep stern pe eur zorc'hen diskiant, ha netra a wir ac'hendall! Ne vijec'h eta nemet girio, ha girio hepken! Siouaz! nan! Ma ne zo Doue ebet, ne vijec'h nemet se! Ha biskoaz e zo bet deuet d'in kement a anaoudegez evel dirag ar wirioneo-ze, eus talvoudegez ar c'homzo kêr ha leun a furnez a lennomp er Skritur

Zakr diouzoc'h, o ma Doue, pa lavar d'imp ec'h oc'h an « hini a zo (1) », « an hini an neus grêt peb tra (2) », « an hini na zo grêt netra hepan (3) ». Neuze eta kement tra a n'eo ket diazeet warnoc'h ne gav harp neb lec'h ken hag a goue betek dont da dizrei da netra.

« Chomet eta ganiimp, o ma Doue (4) », rag, c'hwi êt arog, eus ar gourc'hemenn roet d'an dud da vevan herve ar vad, petra a chom ? Netra, nemet stumm an tamm douar man, evel a lavar An Abostol sant Pôl, ar bed man, en gwirione, hag a ginnig d'imp e vado ha, dre e vado, e blijadurio. Met ar bed a dremen, ha fonnus, hag eo red bean gant-se evit kemer an treo a rei vad pe blijadur. Ha penoz o c'hemer ? Ma Doue, ma ne vec'h ken enno, ha ma ve stlapet a goste assemblez ganec'h an tro ze holl am eus komzet anê, ha n'int netra hepoc'h nemet seier goulou, an Dever, ar Vad, ar Vertu, ar Gwir, al Lealded, neuze ne dalve ken ar boan evit an dud bean nec'het o klask pe mad pe fall e vo d'ê kemer ar pezh a c'hoantafont : n'o deus nemet eun dra da zellet, kemer an hent a gaso d'o flijadur pe d'o frofiden ; ha bêroc'h ha zuroc'h a ze e vo an hent, ha gwelloc'h a ze ive e vo, pen-eo-gwir, c'hoaz eur wej, ne zo nemet se hag a dalve eun dra benag.

An hini a garfe mont betek ar par pellan gant an

(1) Ex. iii. 14.

(2) ha (3) Pennad kentan Aviel St Ian.

(4) Luc. xxiv, 29.

hent-se, ne vo ket nec'het o klask goût hag-en, 'n eur vont da red da difenn e lod er mado hag er plijadurio, ne wash pe frik den ebet 'n eur dremen, hag-en ne lez ket war e lerc'h tu pe du dêro hag anken, hag-en ne laka ket an dismantr en eur familh benag, hag-en ne had ket dre-holl an dristidigez hag an dienez. Forz zo ! ne deufe ket en dro evit ken nebeud, na chom da zellet eus e labour ! Da berak ? ne gompren ken an girio Madelez, True, Karante an nesan ; an treo-ze n'int nemet eun tammig teneredigez a-ziavez, hag an deneredigez n'he deus nemet tewel mik pa ver o klask arc'hant pe blijadur ; hag a dalc'hfe gant e hent 'n eur vougan e zantimant dre vez.

Ober a rafe evel hini pe hini deus potred ar gwêturio dre dan, pa o deve gwasket dindan ar rojo unan benag war o hent, mont a rafe buhanoc'h, e galon ken laouen ha biskoaz, evit n'arruo ket betek e ziskouarn klemmo ar re an nevo hanter-lac'het. Evitan, bean mestr war an dud all an nije eun dalvoudegez hag eun dudi dispar, rag ar re a dalc'hfe ar galloud en o dorn a c'hallfe, evel ma karfent, tennan d'o zu arc'hant ha plijadur. Bean dindan eur mestr, er c'hontrel, a vije bean dindan dreid hep gallout biken tanva ar blijadur nemet marteze taken ha taken, na dastum bernio arc'hant.

Ken-meur-rak-se, eur c'hoant dreist-muzul an nije da arruout ive d'e dro da vean mestr. Met an holl a vije eveltan o klask kêr an trec'h, ha neuze e vije etre an holl elbinig ha kann da c'hout piou a chomo mestr

evit 'n em zerviji ar gwellan ; hag ar vue fall-ze a badfe hep ehan, ha peb hini a glaskfe dont a-benn eus ar re all n'eus forz penoz hag e vefe dre ar fallan. Ah ! braoan bed am mijemp ! ha pegen dous eta e vije bevan war an douar !

Gwelet a red breman pegen bras eo an dismantr a zo o c'hedal eur Vro, pa glask ar re a zo o ren anei n'eo ket hepken ober da Zoue, en sperejo hag en kalono an dud, eun tammig bihan bihan a blas, met dreist-holl pa glaskont lezel Anean rik a goste. Kement kammad an neus gret d'imp ober hon renerien war an hent-ze a zo bet evit hon Bro ken alies a gammad war drevn goude bean troet kein d'ar wir sivilization. Ha tamm ha tamm e tostaomp ouz stad, ne laran ket ouz stad tud ar Broio gwez, rag enno da vihanan e ve doujet eun Doue, hag ar galono a zo stag awalc'h c'hoaz ouz an Dever, ar Vad, ar Vertu, ar Gwir hag al Lealded, met ouz stad ar Gevredigezio hep skiant (perak souzan dirag ar gir ?) ouz al loened ; ha c'hoaz ne vije ket rik awalc'h ar memes tra : en gwirione an dud a vije gwallurusoc'h evit al loened, rag o fallente a vije krioc'h ha muioc'h a ijin o dije war an drouk.

II

Marteze e larfet-hu d'in, Hon Breudeur Ker : Ia, pe ve zonjet ervad, gwir eo penn-da-benn ar pezh ho peus diskoeet, hag an treo spontus hoc'h eus diskleriet evit bean freuz eur gelennadurez

didoue roet d'an dud a dle zur mad bean tamallet d'ar gelennadurez-ze. Ebarz eur spered an nevo skoet Doue er-mêz, ne chom netra hag a c'hallfe bean men-diaze an dever, ar vad, ar vertu. Ia, kement-se a zo gwir ebarz al levrio. Met ebarz ar vue, laro Taine evel ma karo, n'a ket an treo ken eün na ken reiz pen-da-benn evel ebarz eur « problem » pa labourer war ar « chiffro kentan ». N'am meump nemet zellet en dro d'imp : ebarz ar vue pemdeiek e c'haller bevan herve ar wirioneo a ve kollet ar wêll anê. Eur pod a c'houez-vad a ve gantan c'houez-vad pell goude ve goulou. N'am meump ket eta da gât aoun ec'h afe c'hoaz ar bed war an tu gin.

Goud ouzonn, Hon Breudeur Ker, n'a ket an dud dalc'hamad eün beteg ar par pellan gant an hent a gemeront, da vihanan, n'eont ket dustu beteg enno. Goud ouzonn ive penoz an dud o deus nac'het Doue, hag a ra d'ean brezel en ti ar re all goude bean skoet anean er-mêz eus o zi, a dalc'h da gomz evel tud hag a gred en Doue ; ha war o muzello ne zo, koulz laret, nemet ar girio a dever, a lealded, a vadelez, ha ze alies gant eur galon eün ha leun a fe-vad. Zur mad n'o deus ket gwelet da gentan al liammo a stag ar wirioneo-ze ouz Doue. Sonjal a ra gantê e maint aboe a viskoaz en o zav dreizê o-unan, hag, evit chom, n'o deus eomm ebet na skoazel na diaze. Goud ouzonn ze, met goud ouzonn ive penoz ar greden-foz-ze n'all ket pad gwall bell nag an daoulagad chom dalc'hamad zerret d'ar wirione. Arru a refont dre gêr pe dre heg da welet

an treo evel m'emaint. Ha setu aman dre benoz ec'h arruont enno. Ma ne zo Doue ebet, n'o deus ket eomm da gât aoun e vefent kastiet pe dic'haouet nemet gant an dud. Met an dud n'allont kastian pe dic'haoui nemet an obero a wêlont, ha ne wêlont nemet ar pezh a ve gret a-ziavez ; o lagad n'all ket mont beteg an diabarz : ar gouztians a chom prennet evitê. Doue, ha Doue e-unan, a dap beteg peb kuzan ha pep tenvalan eus ar galon (1). N'o deus ket eta da vean nec'het gant ar pezh a dremen en diabarz o c'halono pe o spered, ha gwall diskiant e vijent, ma teufent i oc'h unan da 'n em damallout tra pe dra, pen-eo-gwir den biken n'ouveau an dra-ze da damallout anean d'ê. Neuze eta raktal e teu o spered da wêlet sklêr mad n'eo netra monez rebechus ar gouztians, hag e vougout ar vouez-ze. Met ar gouztians a goll he bue gant e mouez, ha setu ne van ken nemet eun dra da reizan ar vue : trei diwar ar pezh a digasfe d'ar galon re vras glac'har, ha mont laouen ha dinec'h trezek an treo all, n'eus forzh pere. Er vue pemdeiek e ve gret evelse. Met evit arruout enno, c'hoaz eur wej, e zo eomm amzer, muioc'h pe nebeutoc'h herve an danve a zo oc'h ober spered peb den, herve ive an ijin a laka peb hini da c'houlouen digant e spered diskoe d'ean an hent ; met pe eun tammig kentoc'h pe eun tammig divezatoc'h, holl ec'h arruont er memes poent : ha neuze e c'haller gwelet petra eo eur gouztians skanvaet deus zamm he deverio. Oh ! n'eo ket eun dra gêr !

(1) Jerem. xvii. 10.

Ma keret e wêlfomp 'n eur glask e-touez an dud ebarz ar bed pegen gwir eo ar pezh a laran. « Ar falzkreden, evel eur c'hanser, o c'hone tamm ha tamm, 'n eur grignât en dro d'ei, « *ut cancer serpit* (1) », eme an Abostol sant Pôl. Zellet en dro d'ec'h ha laret d'in hag-en n'all ket stokan gant an dorn, koulz laret, ar fall grêt en hon Bro Frans gant ar geleन्द्रadurez didoue a ve roet d'ar vugale ha d'an dud vras er skôl hag e-mêz a skôl.

Darn dija n'o deus ket zouzet dirag ar freuz spontus a doug ar spered a neve dizammet deus doujans Doue. En penn kentan, an Anarchisted ; anaveout a ret o gir : « na Doue, na Mestr », eme. N'allomp ket kât komz gwelloc'h na sklêroc'h evit diskoe reiz ar pezh hon deus c'hoant da zisklerian aman. « Na Doue, na Mestr », e laront, « an eil ac'h a da heul egile, rag ma ne zo Doue ebet ken, n'all ken ive bean mestr ebet ha n'oullomp hini : kement den hag a zo roet d'ean galloud war an dud all hon deus kasoni outan, ha kement hini a glask lakât anomp da blega dindan e lezen a zo evidomp eun enebour eo red 'n em dizober dioutan n'eus forzh penoz hag evit n'eus forzh pegement. Ni a vank d'imp bevan hon bue evel ma c'hoantafomp, hep bean enebet gant den ». O klevet komzo a sort-ze, hiniennno marteze a laro : « red eo d'an dud-ze, bean kollet gantê o spered ! sodien kez ! » — Tud sod ? n'int ket, Hon Breudeur Ker, met tud hag a vev herve ar « *prinsipo* » pe gentoc'h herve ar

(1) II Tim. ii. 17.

menozio diskiant o zo en o fenno. Digomprenn e vent kavet, met sonjet ervad o deus eun tamm mat a lans war ar bagad tud a zo en dro d'ê, rag o spered an neus labouret fonnusoc'h evit hini ar re all, hag ive muioc'h a wad-berv, a hardiegezh, a nerz-kalon o deus, hag o deus stlapet arog buhanoc'h ar gizio a vir c'hoaz an dud all etreze. Met n'int ket tud digomprenn! n'int ken nemet tud hag a c'houve mont beteg ar penn pellan eus o sonj hag o c'hoant. Ha pa vo laret an treo evel m'emaint : ma ne zo Doue ebet, e man ar wirione a du gantê. Pet a zo anê en de hirie war douar Frans? dies eo hen laret; met ar pez a zo zur, ar gont anê a zo kalz brasoc'h evit bean zo ugent vla. Ha c'hoaz e talc'ho da vont war greski, ma ne ve kavet netra da wellât ar gelennadurez fall a ve roet hirie, ma ne ve ket diazeet ar gelennadurez ze war an Hini na zo nemet dismantr a-ziavezh d'ean, war Doue.

Goude an Anarchisted hag en o c'hichen e hanvin ar Gomunisted. Ar re man ive o deus disklêriet na zo Doue ebet, hag a zo êt gant an hent digor dirakê. Ne laront ket evel an Anarchisted : na Doue na Mestr; n'oulfent ket ne vefe Mestr ebet war ar Vro, er c'hontrel eo, an dud a digoeo d'ê bean Mestr war ar re all o devo brasan galloud a c'heller kât, hag o dorn a dleo poezan pounar ha kri war ar re a vo dindanê. 'Vel just ar Galloud-ze, i, n'int ket gret da blegan dindanan, met da gemer anean holl evitê o-unan. Ne vo Mestr ebet nemete, ha mistri e vefont a n'anavefont ket an

drue. Rag eur c'hoant dispar o deus da ren war an dud all ha da gemer o flijadur. Hag evit heuilh o c'hoant, e rafent awalc'h n'eus forzh petra. Laret awalc'h a reont kement-se hep klask 'n em guz : lennet o c'hazetenno, chilaouet o frezezenno : dizurz ha gwad a vank d'ê. Ah! dizammet o deus diwar o sperejo bec'h pounar an treo a ve grêt ane an dêver, ar vad, ar fall, ar vertu, an tech-fall, al lealded, an displealded! Kontadenno ar treo ze holl! Kôzio gret gantê o amzer, mad c'hoaz marteze da didui e amzer d'eur paourig kez benag! Ne zo nemet daou dra er bed : an arc'hant hag ar blijadur. Kement tra, eme an dud fall-ze, a gas an den beteg an eil pe an all anê, a zo mad : enno, n'eo ket el lec'h all, e man merk zakr an dever. — An Anarchist a zo eur blei, hag eur blei drouk kêr, met eur blei hag a zo barnet da chom e unan, pen-eo-gwir n'oull eus mestr ebet, hag eun den e-unan na lakao ket eur Vro a-bez da grenan dirakan. Ar Gomunisted, herve ma zonzj, a zo droukoc'h, rag int ive a zo bleidi, met bleidi hag a vale a vagad, unanet ha galloudus, hag a zo o tanzen kouean asamblez war ar paour kez danvad. Bras eo ar gont anê, bras kêr, nan en Breiz-Izel marteze, met er c'hêrio bras; ha bemde maint o klask kreski o niver hag o nerz, hag evit-ze e labouront gant hast ha hep ehan. Ar Vro he deus da diwall dioutê! dreist-holl pa wêler ar Gouarnamant hep difenn dirakê. Ha penoz ne vije ket hep difenn dirake? Dleout eo d'ean anzav ec'h eo ar Gomunisted ar gwiran freuz hag ar re muian

dare an neus douget o c'helennadurez didoue. N'eus ket pell c'hoaz, e spontas ar Frans a-bez o klevet pebez kasoni ha pebez menozio an nevoa an dud-ze en o c'halono; ar spont-ze n'eo ket c'hoaz tremenet mad; hep dale e c'halfe awalc'h mont adare war wasât...

E-tuont, ne dalve ket ar boan zerri an daoulagad gant aoun da wêlet : dre mac'h eo ét Doue er-mêz eus o c'halono, dre ive ma zikour deus e welan ar Gouarnamant kas Doue er-mêz, kalz kalz a dud, ar re uhelan plaset, kenkoulz hag ar re disteran, n'o deus ken kalz a hent da ober da vean henvel ouz ar Gouarnisted. Santout a rer eo tremenet ar maro dre o ine hag he deus astennet warni he c'hraban ien ha garo. Aboe eun toullad blavejo — rog ar brezel dija e vije gwelet kement man, met aboe dreist-holl ec'h eo gwasoc'h da wêlet — e komzer eun tamm dre-holl ec'h a ar gouztians war denvalât hag war ledanât. Gwir eo, gwiroc'h evit e kred gant kalz. Er marc'hajo, an onestiz ac'h a er-mêz muioc'h-mui ; war goac'han ive ec'h a ar fizians a zo en kenver an dud hag o lealded. Hag an drouk-ze a zo e-touez an dud vras evel e-touez ar re vihan : eman dre holl. Al laëronsi n'eo ken laëronsi : pe ve gret diwar goust ar mestr, 'n eur ober nebeud a labour ha labour fall, pe ve gret diwar boez ha danvez ar varc'hadourez gwerzet, al laëronsi a deu da vean hanvet finese ha labour vad ; ne zonjer ken kât mez eus-ze, er c'hontrel, zevel a rer uhel ar penn hag ar vouez da 'n em veuli. Eus a bep tu e

klask an den tennan eus e zouar, eus e gonverz, eus e usino, eus e varc'hadourez, n'eo ket ar pez a zo dleet ha herve ar gwir, met ar muian ma c'hall. An arc'hant eo al lezen-veur hag a bleg an holl diraki hag a walc'h peb drouk deus ar pec'hed. Unan benag, eun devez, a laras eus krec'h ar gador-brezeg en Kambr an Deputeed : « an Arc'hant hepken a zo kiriek da gement tra a ra an dud ». Siouas ! arru eo al lavar-ze da vean gwir evit an darnvuian ! E-touez, zoken, an dud gwieg hag a zo en-renk uhel er Vro, elec'h e sonjfer e vije da vihanan chomet evel en o zi diwean al Lealded hag ar Vertu, pen-eo-gwir ec'h é da gât an dud-ze ec'h er pe ve d'ober goulén eun die'haou benag, hag-en ive an arc'hant neve ket alies ar gir diwean ? Ha diwar-ze e ver en disfi bras. Arru eo tenn an treo etreze holl. Mont a reint c'hoaz war wasât. Diwallet ! Neb a sonj penoz e oa ar bed, bean zo ugent vla hepken ha petra eo breman, a zo spontet : « nag a hent hon deus gret aboe, e laront holl ; klanv omp da vat, ha ma talc'h an treo da vont, ma ve dalc'het Doue ermêz eus hon lezenno hag eus ar skôlio, ar re a deuio benn ugent vla aman, benn dek vla marteze, pe zellfont ive a-drekê, a sponto muioc'h c'hoaz, me hen lavar d'ec'h, rag an islonk e vo kouean enna da ober a vo dounoc'h hag euzusoc'h ! Gant an treo man e man kont, diwallomp d'hen ankouaz, evel gant ar vein a 'n em distag hag a ruilh diwar lein ar meneio : deus uheloc'h-ze e teuont, ha gant muioc'h ze a herr e koueont.

Me gred ne zo den ebet e-touez ar re o deus heuilhet ma rêzonio penn-da-benn, ha na wêlo ket pegen bras zervij a rent ar Gatoliked d'hon Bro ha d'ar re a zo karget da ren anei, pa glaskont, evel ma reont, harz da darevi ar freuz a doug al lezenno didoue — dreist-holl pa reont kement a zo en o galloud evit delc'hel leun a vue hag a nerz o skolio, o faëronajo, o c'hollajo, o Seminerio bihan ha bras, an urzio a venec'h hag a leanezed en hospitalio, er skolio, er c'houencho, treo holl hag a dalc'h gant preder en ineo bleunen an O. Doue. Hag ar vleunen ze a deui diouti hep-dale freuz kêr a beuc'h, a urz, a zoujans, a vadelez, a garante hag a vertuio a bep sort.

Kredi ran ne vo hini ha na wêlo ket sklêr mad penoz eun den a greden, ma teu e greden, eur greden wirion a laran, da gât en e vue pemdeiek ar plas a dle kêr, a reseo deus ar greden ze eur gwell zikour evit ober e zever e-kenver e nesan hag e-kenver ar Vro. An den-ze ive ma teu d'ean ar c'hoant direiz da 'n em lezel da vont d'an displealded pe d'an techofall, raktal e gouztians a zavo gâro he mouez, ha ma kerz bepred war e gouztians, ne chomê ken e galon en peuc'h : mouez ar gouztians an nevo dizentet a vo enno hep ehan o tamallout d'ean e bec'hed ac'han an nevo dic'haouet.

Ken gwir all ive, kredi a ran ne vo den ebet ha na wêlo ket sklêr mad penoz kement tra hag a glask bihanât ebarz eun ine ar plas dleet da Zoue, a goac'h, war ar memes tro galloud an ine-ze evit ar vad

hag he nerz evit diwall deus ar fall : mont a ra ive war fallât da doujan ha da zenti, hag e teu da vean diesoc'h da gontanti ha da gomandi. Perag eta sonjal neuze eus Renerien Broio hag a glaskfe skuban Doue deus an ineo? Ouz piou e vefent henvel? ouz eun tad a familh hag a c'hoantafe a greiz e galon ober evurusted ha bean madelez tud e di hag a rafe d'e vugale eur gelennadurez a gasoni hag a dizurz mad da vagan ar vue fall ebarz an ti. Ma karje hon Gouarnamant digori e zaoulagad ha gwelet petra a zo evitan talvoudus, a rafe d'imp mil bennoz o 'vean ma stourmomp a-enêb d'al lezenno fall a zo grêt evit stlapan Doue er-mêz ar Vro, rag, 'n eur gemer evidomp eur gir laret gant eur prezegez katolik (1), oc'h ober ar pezh a reomp, « e tiwallomp ar Gouarnamant dioutan e-unan ».

Setu aze, Hon Breudeur Ker, gwirioneo disket d'imp gant an disteran furnez. Pegoulz eta e vefont komprenet? Pegoulz e vo gwêlet ar re o deus ar garg enorus met pounar da ren ar Vro o tiwall da glask ober treo imposubl, da laret eo, ober urz gant menozio hag a doug dre natur freuz a dizurz, ober peuc'h gant menozio a vrezel hag a lac'hadeg, ober vertu gant had an techofall? Pegoulz e welfont ne gaser ket ar bed war rok 'n eur heuilh an hencho a gas da netra? — Pedomp Doue ma paro e sklerijen war an denvalijen a dall anê, evit ma trofont outan ha ma

(1) de Mun. Prezegez diwean en Kambr an Deputeed.

touffont freuz a vue (1). Ha ni hag hon deus an eurvad dispar da gredi en Doue hag a ouve talvoudegez an tensor-ze, bevomp evit ma teuiö ar re a zello ouzimp da brizout ha da c'hoantât evitê ive an tenzor-ze. Evelse n'allo den ebet gwêlet hon bue, hon madelez gwirion, hon c'harante vras, hon zrue hep muzul evit ar re all, hep bean red d'ean anzav dirag an holl penoz, mac'h eo red laret ne zo netra a-ziavez d'ar fe da c'hallout magan dalc'hmad nerz an den trezek ar vad, ar fe da vihanan a zo hag a chom ar vammen bepred leun a zour a vue, elec'h ma kavo zur mad ar Bobl, kement ha ma c'heller kât anê war an douar man, ar peuc'h wirion, ar binvidigez wirion hag an evurusted wirion.

SETU PERAK :

Goude bean pedet an Otro Doue,
Ha 'n em glewet gant Otrone Chaloned Iliz-Veur
Katedral Sant-Brieg,
Hon deus gourc'hemennet hag e c'hourc'hemennomp
ar pez a zo aman warlerc'h :

ARTIKL I

Digas a reomp da sonj d'ar gristenien, eo gourc'hemennet gant an Iliz da gement hini a zo eur bla war-n-ugent achu ha n'eo ket c'hoaz krog en triugent vla, iun bemde, nemet da zul, e-pad ar C'Hoareiz ;

(1) Ez. xxxiii-11.

ha, da gement hini a zo seiz vla achu, ober vijel : de Verc'her-ar-Meur ; peb gwener ha peb sadorn, e-pad ar C'Hoareiz ; ha, gant an Daouzek-Deio, da verc'her, da wener ha da sadorn.

ARTIKL II

Koulskoude, gant permision Hon Tad Santel ar Pab, roet an 22 a viz C'houever 1922, e vo groet en Eskopti vijel d'ar merc'her elec'h d'ar sadorn e-pad ar C'Hoareiz.

ARTIKL III

Gallout a c'heller dibri kig de Iaou-C'hemblid ; ha, da Sadorn-Fask, adaleg kreiste, e vo achu da iun ha da vijel ar C'Hoareiz.

ARTIKL IV

E maëz ar C'Hoareiz e zo vijel kouit a iun, peb gwener ; iun ha vijel en de diarog ar pevar gouel bras-man : gouel ar Pentekost, gouel ar Werc'hez Hanter-Eost, gouel an Oll-Sent ha gouel an Nedeleg.

Koulskoude, herve ar c'hustum aboe gwejall amzer, en hon Eskopti na vo na iun na vijel de sadorn ar Pentekost.

ARTIKL V

N'eo ket difennet dibri e-pad ar C'Hoareiz kig ha pesked d'ar pred.

E-kerz ar C'Hoareiz, e c'heller ive dibri uo, de Wener ar Groaz zoken.

Ar re 'zo dleet d'e iun, n'allont, en deio iun, dibri
uo nemet d'eur pred hepken.

Gallout a c'heller implian bemde leaz hag amann
gand ar pred bihanan zoken.

Gallout a rer implian bloneg ha zoa d'ober souben
ha da ôzan boed, en deio iun ha vijel, koulz en tri
de diwean euz ar Zun Santel hag en amzer-all.

ARTIKL VI

An Otrone Personed, beleien ar c'houdencho hag ar
c'hovezour, a roio brasoc'h dispans c'hoaz, mar be ret,
d'ar re a c'houlenn digante.

Kelell a refoint start ar gristenien da ziwall ouz an
evaj hag ouz ar vêventi ; rag an tech fall-ze a zo, evel
eur gwall walen, o waskan hon bro.

ARTIKL VII

An Otrone Personed a alio ar gristenien da gomunian
gant Pask peb hini en e Iliz-parrouz ; neb an nije groet
e-lec'h-all e gomunion-bask a dle hen rei da c'hout
d'e Berson.

An Amzer Bask a zigoro ar bevaret sul eus ar
C'Hoareiz, hag a glozo d'an eil sul goude sul Fask.

Ar vartoloded, a ia da besketa da bell bro, a c'hallo
ober o fask adaleg miz C'houever.

ARTIKL VIII

Alian a reomp ar Bastored da zarmon diou wech

ar zun, e-pad an C'Hoareiz, ha d'ober Hent ar Groaz
da wener. Goude, e vo gallet rei Salud ar Zakramant.

ARTIKL IX

Pidi a reomp ar gristenien da ren bue santel,
da vean devot d'an ofiso, da zont d'ar zarmonio, da
ziwall eus ar pec'hed, da laret ar pedenno, en o zi ;
ha, da rei *Aluzen ar C'Hoareiz*, peb hini herve
e zanve.

Astenn a reomp an dorn da c'houlen, en han' Doue,
an aluzen-ze digant holl gristenien an Eskopti ; rag,
mac'h eo dleet en peb amzer ober aluzen, koulz a ve,
neb an neus peadra, a renk ober anei gant mui a volonte
vad c'hoaz.

N'eus forz pegen bihan e ve aluzen ar paour, tenna
ra, war-n-an ha war e di, bennoz an Otro Doue.

ARTIKL X

Aluzen ar C'Hoareiz a vo roet en o dorn d'an Otrone
Personed pe da veleien ar c'houdencho. Mad e ve kouls-
koude lakât e-barz an Iliz eur c'hef merket warnan :
Aluzen ar C'Hoareiz, evit digemer arc'hant ar re
e ve dies d'e hen kas d'an Otro Person.

ARTIKL XI

Pidi a reomp ar gristenien da rei, peb hini muian
ma c'hallo, evit ar Seminero, evit ar Skolio kristen hag
evit Diner ar relijion.

Fournis d'ar Seminerio ar pezh o deus ezom, ha, muioc'h c'hoaz, sevel eur Seminer nevez, a zo daou dra a n'eont ket hep damant na poan-spered.

Kontan a reomp war largetez ar gristenien da zikour anomp da gas da-benn an obero mad se a zo ret d'erc'hel evit sevel ha diski ar re a zo galvet da vont da veleien.

Koulz all, hep ar Skolio kristen, hen gout a ret, n'eus ket relijion gant deskadurez ar vugale, hag ar fe hec'h-unan a ia da goll.

Ret eo, kousto da gousto, mirout ane.

Diner ar relijion a zo evit zikour ar veleien n'o deus ken paë ebet digant ar gouarnamant ; anez an aluzen-ze, na voint ket evit bevan ; ha gant-se, eo dleet da bep kristen rei anei, herve e c'halloud, ha dindan boan a bec'hed.

ARTIKL XII

De Sul ar Rouane, e vo groet ar gest evit ar Sklaved ; kest Gwener ar Groaz a vo, herve bolonte Hon Tad Santel ar Pab, evit an Douar-Santel ; hini sul ar Benz, evit ar bevien glanv ha diremet 'zo en Hospital Sant-Brieg ; hini gouel an Ebestel sant Per ha sant Pol, evit Diner Sant-Per ; hini an eil sul a viz du, evit an ilizo paour eus hon Eskopti ; hini an eil sul eus an Avant, evit ar zoudarded hag ar Yaouankizo kristen.

Ar sul diwean a viz Genver ha de ouel an Asansion, e vo kestet evit ar Skol-vraz hanvet en galleg : *Université Catholique.*

ARTIKL XIII

Pa zigoco unan-benag eus ar c'hesto-man, pe ar gest evit ar Seminerio, e vo roet da c'hout d'an dud adaleg ar sul arog, en pron an oferen-bred, hag an arc'hant a vo digaset d'an Eskopti.

Pep kest a renker ober anei en holl oferinio hag ofiso.

Al lizer-man, gant gourc'hemenno ar C'Hoareiz, a vo lennet en pron an oferen bred, en holl ilizo ha chapello an Eskopti, ar sul warlerc'h ma vo arru.

Roet en Sant-Brieg, dindan on zin, on ziel, ha zin Sekretour Braz on Eskopti, an 15 a viz c'hoevrer 1925.



† FRANÇOIS-JEAN-MARIE,

Eskop Sant-Brieg ha Landreger.

Dre urz an Otro n-Eskop :

J.-B. CARLUER,

Chaloni, Sekretour Braz.